

CANTIQUE DE ST STEPHAN

1. O sant Stephan, kenta merszer Kouezet war roudou hor Zalver
Lakit don en hor c'halonnou An had eus an holl vertuziou

Meulomp a greiz kalon Sant Stephan hor Patron

2. Didabet 'vit ho kalon aour Da zervicha tol an dud paour
Grit ma vo bras hor c'harantez Evit an dud er baourentez
3. En ho komzou rannou ar Feiz A lintre splann evel an deiz
Grit ma paro en hor spered Eur Feiz skedus 'vel ar stered
4. Betek dindan falc'h ar maro C'houi bardonas d'ar bed garo
Grit ma vo kavet hor c'halon Leun a druez hag a bardon